

102

Au fol° 185 recto, seulement le titre :

Coattredrez .

(185 recto)

[rien aux fol° 185 verso et 186 recto.]

Tredrez .

(186 verso)

Mar plich ganec'h e sileofet  
Eur werc'h zo a newe groët  
D'ar plac'h o vont d'ar Teodet .

Pa voa o vont gant an hent bras  
Daou Kavalier a Renkontras .

— Merc'hik isouank d'in e leret  
Pelec'h e c'het na mar goc'h bet ?

— Deus er ger eo e deuan  
D'ar Bardon er izodet eo e c'han

Me ia d'ar pardon d'ar Teodet  
Mar les Doue anon da vonet

Da Kovessat da gommunian  
Da c'honid ar pardon mar gallan

— C'hwi zo re vras, re a fesson  
Da vont o c'hanan d'ar pardon .

(187 verso)

— Oho, ma iskuzi a red  
Va unan d'ar pardon n'e dan Ket

Da evan dour me wa chomet

Va Kompagnunez arog zo ed  
Mar dalc'han me vo kortoet.

Baron Koetredrez a lavare  
De Palafrinier, enon neuze :

— Distol di amañ war va marc'h  
Me iell da Tredrez buhan awalac'h.

Eur wech all plac'hik me o tesko  
Da chom d'evan dour dre an n'hentcho.

188 verso)

Ar Palafrinier vel ma Klevas  
A vriad er plac'h iaouank a Krogas  
War dallier e varc'h en e lakas.

Gant he vantel en deus i goloet  
Gant aon na viche anaveet  
Gant an dud e vont d'ar Teodet.

Ar verc'hik iaouank a welle  
Nag en eur glem a lavare  
De c'hompagnunez dre me tremene :

— Ma c'hompagnunez ma nem c'heret  
En an' Doue ma sikouret  
Ma di me ganac'h d'ar Teodet!

(189 verso)

O chikour, siwas, n'hellomp ket  
P'e gant an Otrio Baron e heet.

Ma vije gant humall a viche  
Petek ar maro ni ho sikourche.

Ar plac'h iaouank a kirvoude  
Na ne gafe den e c'honsole.

Ar palafrinier a re a voëjou  
A nepoa true eus he c'harrvou!

104

— Tarvit merc'hik na welet ket  
 Me viron n'o po droug e bet.

—  
 Ar plac'hik iaouank a lavare  
 En Kastel Tredre p'an arrie  
 D'ar Gouarnerezh henon neuze:

(190 verso)

— Bezit erwidon Advokadezh mad  
 Nam list em ber va hunan da Kousskat  
 Ni ielo hon diou en eur goëlead.

— Na neo ked da goussket ganime  
 Oc'h hu digasset da Tredre.

Groet e ho goële er c'hampik kloz  
 Gant ar Baron vefet fenez.

—  
 Gouarnerezh hasta breman  
 Lakas-te ar henn eus an tan  
 D'ober d'ar plac'h iaouank he Koan.

—  
 Na pa wa Koan oc'h tol rentet  
 Ar plac'h na zrebe tam e bet.

(191 verso)

— Palafinier na deus en ti  
 Kers te duze er Sall ganti  
 Da c'houd ma chencho e faltaji

Er gall ganti e c'he bed ed  
 Faltaji n'en deus ket chenchet.

— Na Kers te er jardin ganti  
 Da c'houd ma chencho faltaji

Nag er jardin pa int bed ed  
 Da pelia bokejo e nem leket

Da pelia bokejo roz-lavant  
 A geront ar plachet iaouank.

(192 verso)

Pa wa he bokejo dastumet  
Ar Baron kenon zo deuet.

— Baron Koëtredrez me ho ped  
ho Kontel dime a roffet,

Da grenan treid va bokejo  
A zo re hir deus a dreujo

— Merc'hik iaouank ma iskuzet  
Pot ar chontello me na non ket  
Va pognard a po pa gerfet.

Baron pa wezjit ouin me  
Me a zo eur plac'h a ligne  
Choar vager on da Lezobre.

(193 verso)

— Me ne ran fors a Lezobre  
Ken neubent a ran ouit te,  
Be am bo a'kanout fe te.

Divreur horolach pe hous pen  
E bet och ar Varon o ch'ouren  
Diarc'hen, a dizolo he fen.

— Itron Varia a Kulat  
Konsolit va mam a va zad  
Biken no goëlo va daoulagat

A balamour d'ac'h gwerchez Vari  
Na choulenan ked o chofensin

Pa e dizroët an Otho en dro  
E voa ar plac'h war he geno  
En eur poul goad, hag i maro.

(194 verso)

— Penevert daonni va inne  
N' was ked ed goe[?]c'h dirag Doue.

Oll dud va zi ma n em c'heret  
 Pel e an noz id da Koussket  
 N' ay Doue nam diskuillet Ket!

Ar Gouarnerey neus respontet  
 — Mar a weach a moa ho Keleunnit  
 Nag a balamour d'ar (1) merc'het.

Nag homan erwid ar muan  
 C'hoar vager n' otis Kinenan  
 A lakeio ho goad da ienan.

Nan eus servicher ey o ti  
 Na war ho nosvez Kouls a c'huvi.

— N' ay Doue nam diskuillet Ket  
 Peb a Kant SKoët dec'h a vo roët  
 En chapel Tredre vo internet.

(195 verso)

N' wa Ket Kanet ar c'hog d'ay de  
 Pa wa torret r' percher ey Tredre.

Pa wa perjer Tredre torret  
 Gant Kinenan hag he botret:  
 — Nag ar Baron, pelec'h e c'het?

Ar palafinier pa Klevas  
 Gant ar vins ey traon distennas

— Ne medi Ket ma mest war dro  
 Na bet euy daou pe tri de zo.

— Yaou a lerey palafinier  
 Ma na vije Ket da vest er ger  
 Ne voas Ket arze palafinier.

(196 verso)

Kustum out a res mont gantan  
 War en hentcho da plac'hetan.

---

(1). - Peut-être faut-il lire : d'er ?

Ma c'hoar mager Kerc'hi dime  
 Pe me lakai an tan en Tredre,  
 A buhe an Otrio em m'o fete.

—  
 Tredre deus an tour huelan  
 A lere neuze da Kinenan :

— Legez te ganiñ ma buhe  
 A me rei did ma oll danve  
 me rei did ma rent a ma leve.

97 verso)

— Ne ket ta rent a ta leve  
 A ta danve a fell dime.

Ne me ma c'hoar mager a Klaskan  
 A Klevan laret a zo aman.  
 A buhe wid buhe a c'houlennan.

—  
 Kri vije ar galon na wêlche  
 En Tredrez an eb a vije :

E welet an tan gwal en ti  
 Ar Baron e Kreiz o leski.

E welet an tan gwal er maner  
 Ar varon e Kreiz da c'houlær

Ar plac'h iaouank en eur c'haross  
 Da vont da enterrî de paros,

N'otro Lezobre en eur leter  
 O tougen kaon d'he (1) c'hoar mager.

7

[pas de trad. franç.]

(1). - D'abord : d'e ; h écrit en surch. sur cet e : d'he.